

CONVERSION

SANT AUGUSTIN.

Var an ton ancien.

Lustr hac henor ar bastoret,
 Ha sclêrijen an oll Doctoret,
 Tensor ar savantis, menez ar santeles,
 Exempl a binigen hac a sempladures,
 Grit din sclêramant compren
 An nerz a c'hraç Doue o trec'hi calon an den.

Sant Augustin, henor an Afriq,
 Piller bras an Ilis Catholic,
 Disqet din ped effort oc'h eus bet da ober
 Evit chanch ha terri o chadennou pounner;
 Comzit ouzin, car me a souhet
 Dilezel ar viçou, renonç a grenn d'ar pec'het.

Allas! pec'her, me voa c'hoas buguel
 Pa gommancis Doue dilezel
 Evit choas mignonet, tud savant da bec'hi,
 Ha c'hoas e caven gloar o tonet d'o zreti;
 Em yaouanqis n'em boa qen Doue
 Nemet ar blijadur, ar bed hac ar vanite.

Guechal pa velen an actourien,

Dre gomzou , dre fêçonniou monden ,
 Oc'h offr var an theatr ar poeson danjerus
 Demeus ar blijadur hac ar viçou mezus ,
 Me sante va c'halon attaquet
 Gant an desiriou fall hac ar goal vignonet.

Va zalanchou caer hac admiabl
 Ne rent nemet va renta coupabl ;
 Qenlies pas a ren e sonjen gant glac'har
 Penos ne ren netra evit gonit ar gloar ;
 Me a rê al lezen din va-unan :
 Ar veen hep froes mat troc'het ha strinqet entan.

Pet guech ne voan-me qet supliet
 Gant va mam da guitat ar pec'het !
 Mes me voa re superb evit oboissa ,
 Re e plije din c'hoarzin evit c'hoantat gouela :
 Comzou caer va mam hac e daerou
 A nec'he va speret hep terri va chadennou.

Doue , mad en andret ar pec'her ,
 Ha specialamant em c'hever ,
 Daoust d'am oll valis , huel , ledan ha don ,
 A gavas ar secret da bicat va c'halon ;
 Caer em boa cusa va fec'hejou ,
 Gant ar vez me ruye pa sonjen em disurzou.

Doue carantezus a speret
 A sarmone din en peb momet :
 Augustin , poent eo chanch ha quittat ar viçou ;

Poent
 Mes a
 Me vo

Pic
 Evel
 O rec
 Deme
 He c'
 D'e d

Ca
 Oc'h
 Rac e
 E san
 Va sp
 E voe

Squ
 Gant
 Men a
 Mes p
 Allas
 Da re

Ar
 Qerco
 Evit v
 Augu
 Mar f

Poent eo, va buguel qes, pratica ar vertuziou;
 Mes allas! allas! na ren estim ebet;
 Me voa bepret bouzar pa na c'houlennen qet
 clêvet.

Piou so bet qen glac'haret biscoas
 Evel va mam guès, p'am goelas
 O redet d'en em goll en creis an drompleson
 Demeus ar c'hrimou vil ha contrel d'ar rêzon;
 He c'halon gant glac'har a ranne,
 D'e daerou e tlean silvidiguez va ene.

Caer em boa clasq ar gontantamant,
 Oc'h heuill en peb tra va goal banchant;
 Rac er memes instant mac'h offancen Doue,
 E santen va c'halon tourmantet a neve;
 Va speret accablet gant ar boan,
 E voen bourreo, tirant ha suplis din va-unan.

Squis o vea qen mestroniet
 Gant an appetijou direglet,
 Men a essee terri va goal habitujou,
 Mes prest me a squise e combati ar viçou;
 Allas! n'em boa nemet anter c'hoant
 Da renonç d'ar pec'het evit bea penitant.

Ar cher vad, ar c'hamaradou,
 Qercoulz hac ar blijadurezou,
 Evit va abusi, oll ouzin e crient:
 Augustin, Augustin, collet eo da sqient
 Mar fell dit renonç d'an esamant

Evit laqat da gorf ha da speret en tourmant.

Ar c'horf incessamant a lavare :
 Pa eo qer bêr amzer ar vuez ,
 Pesjoa eta, Augustin, dalc'h mad da vignonet,
 Ar brava pinigen eo plijadur ar bed ;
 Neuze ne vouien penaus ober ,
 Mes chom a ren bepret dindan grifou Lucifer.

Va c'halon beuzet gant ar chagrin ,
 Amezec em bue libertin ,
 Alies e laren : varc'hoas me gommanço
 Da renonç da Satan ha d'ar vaniteou ;
 Mes perac qen varc'hoas diferi ?
 Hac én a esctay va chadennou da derri ?

Pa voan var ar poent d'en em renta ,
 Car ne ren pelloc'h nemet gouela ,
 E clêvis laret din : qemer, qemer, ha len ;
 Pa zigoris al leor e qevis ur bagen
 Var beini e lennis va goal stat ;
 Neuse e chenchas agren va c'halon evit mat.

Consider, pec'her ha pec'heres ,
 An nerz, an douçter, ar vadeles
 Deus ar graçou divin o picat va c'halon ,
 Livret d'an drouc-speret evit pales a tron ;
 Ne voa nemet graç Doue capabl
 Da denna va ene deus ur stat qer miserabl.

Ar c'hiq, ar bed hac an drouc-speret
 O devoa qement va goneet ;

Brein e voan gant ar viç bete mel va esqern,
 Prest e voan da gouea en creis punç an ifern,
 Pa deuas ar mestr eus an oll galonou
 Da drec'hi va c'halon goude calz attaqou.

Qerqent a ma chanchis a vue,
 E qevis gant joa va mestr neve;
 Neuse oll ravisset, gant joa e lavaren:
 Diveat ho caràn ô guenet ancien!
 Ia, guir eo, hac hep mes en e laràn:
 Guenet bepret nevez, re diveat ho caràn.

Me sante gant calz a blijadur
 Em c'halon un tan dreist an natur,
 Tan mignon gant Doue dre e c'hraç alumet
 Evit va excita muioc'h-mui d'e garet;
 Neuze pa na jujere nemetàn,
 E cresqe dez ha nôs va c'harantez evitàn.

Guelet e c'heus, pec'her aheurtet,
 Ebars em etat da vir bortret;
 Mar deu Jesus hirie da rei dit e c'hraçon,
 Na lavar qet eveldon: varc'hoas, varc'hoas,
 autrou;

Mes diles da grimou prontamant,
 Gallout a elles quea en ifern en peb instant.

Lenne alies gant humilite
 A leor sacr eus al lezen neve,
 Ennàn te a gavo sclêrijen da speret,
 Ha da galon daerou da vouela da pec'het;


Enna e velo da zaoulagad
 Ar pezh a gommand dit Doue da vestr ha da dad.

En peb fêçon e meus difennet
 An Ilis eus an heretiquet,
 Drescrijou, dre gomzou, dre sarmoniou nerzus;
 Divoal da gavet commerc gant tud qen danjerus;
 Divoal, ha divoal pis eus an escumunuguen,
 Da ene eo ar branc hac an Ilis ar vezen.

Qeit a ma chommis var an douar,
 Ne meus bevet nemet er glac'har
 Da vea offancet un Doue qen êmabl;
 Va breur, evit bea penitant veritabl,
 Eo ret dit er binigen mervel,
 Dindan poan da vea tolet en tan eternal.

D'an oll emeus lavaret a voues sclêr,
 Penos e voan ar brassa pec'her;
 Guir hent ar barados eo an humilite,
 Bete fin da deziou crên rac ar vanite,
 Rac eur moment qent antren er gloar
 E hel ar vanite ober dit coll ar victoar.

Sonch alies en calon Jesus,
 Calon poaniet ha carantezus;
 Bez fidel de garet ha da souffr evitan,
 Rac én en deus souffret evidout da guenta,
 Bez sonch penos calon eur c'hristen
 A dle beza eur galon a binigen.



CANTIQ

VAR HANO JESUS.

Var un ton anavezet.

Hoc'h Hano sacr, ô va Jesus!
 Pehini so qer gracios,
 Ra vezo va oll esperanç,
 Hac e pep peril va fizianç.

Ra vezo va oll joausdet,
 Qeit ha ma vezin var ar bed,
 Prononç an Hano beniguet
 Eus a Jesus, Salver ar bed.

Va Jesus, ne zesiràn qen
 Nemet disqi ar guir voyen
 Da servicha ho Majeste
 Qeit a ma vezin en bue.

O va Zalver! ô va Jesus!
 C'houi eo va zensor precius;
 C'houi eo, Jesus, va guir Roue,
 Va difennit bemnos ha de.

Hoc'h Hano precius ha santel
 Zo d'am guinou qen douç ha mel;

Ur joa bras ameus o clêvet
 Prononç hoc'h hano beniguet.

Ra vo Jesus incessamant
 Em memor, em ententamant;
 Ne fell din caret netra qen
 Nemet Jesus da virviqen.

Pa ho quelàn, ô va Zalver.
 Er Sacramant eus an Auter,
 Dre an daoulagad eus ar Fe
 Emeus ur joa vras em ene.

Hoc'h Hano sacr, ô va Jesus!
 Dreist peb hano a so eurus,
 Da nep er prononç a galon,
 Gant respet ha devotion.

Evit racquitta an oll bed,
 Ar maro oc'h eus anduret;
 Na bermettit e ve collet
 Ar pris eus ho Coad beniguet.

Me ho suppli, ô va Jesus!
 Dre hoc'h Hano carantezus,
 Pa sortiin eus ar bed-man,
 Asistit var va zremenvan.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Var.